

Nnn 138

# Louarnig

Sell ouzh ar bed en ur mod dishenvel

P.8 **C'HOANT  
NIJAL ?**



P.6

**YUNA & TUALLENN**

En niverenn-man :

P.2  
**PETRA  
'NEVEZ ?**



P.8  
**A-DENN  
ASKELL**

P.4  
**BRANDON**

P.4  
**Naggeneen**

P.6  
**AR STROLLAD  
ADNOZ**



P. 16  
**MEURIAO**



P.13  
**PAOTR  
LOUARN**

En niverenn o tont



**Louarnig**

Mensuel - N°138  
du 1<sup>er</sup> mars 2014  
5€ an niverenn / 5€ le numéro  
60€ ar bloaz / 60€ l'année  
Niv. CPPAP : 0514680670

Embannet gant / édité par :  
KEIT VIMP BEV 29520 LAZ

Rener an Embann /  
Dir de Publication :  
Yann-Fañh Jacq, yf.kvb@orange.fr

Kenurzhier ha maketenn  
Coordinatrice et maquettiste :  
Camille Argouarc'h,  
camille.kvb@orange.fr

Moulet gant / imprimé par :  
SOFAG, BP21 - 29590 AR FAOU  
Skeudennoù a zo implijet gant  
Aotre-Implijout Creative Commons  
Dereñ/Kenrannañ  
Certaines images utilisées sont  
sous licence libre Creative Com-  
mons ou <http://www.photo-libre.fr>.  
(<http://www.creativecommons.org>)

creative commons

Embannet gant skoaz  
Avec le soutien de



DIGREDUS

**BISKO AZH KEMENT ALL...  
PEVAR LAGAD D'AR  
MARC'H DALL !!!**

**"DIRK" HAG "ULLA"**

**Tizh an avel :  
betek 140 km/e !**

**Barradoù avel ha dour-beuz !**

Skoet eo bet Breizh gant div gorventenn vras : Dirk (fin miz Kerzu) hag Ulla (miz C'hwevrer) ha reuz a zo bet war o lerc'h : gwez kouezhet, tiez, straedoù pe Pradoù beuzet gant dour, tredan droc'het e 100 000 ti hag e-pad pell...

**Petra zo c'hoarvezet du-se abalamour d'ar gorventenn ?**

**Kas da boltridi deomp !**

camille.kvb@orange.fr pe Louarnig, 22 grand rue, 29520 LAZ

# PETRA 'NEVEZ ?



## KANAOUENNOÙ E BREZHONEG A RA BERZH WAR AR ROUED@ !



4 vet klas

Skolaj Diwan Gwened

Ha deuet eo giz ar "CUPSONG" betek da skol pe da skolaj ? Ober jestroù a-stroll, bep a werenn, evit krouiñ ul lusk evel ma vez graet en ur ganaouenn vrudet eo ar pal. Tizhet eo bet skolaj Diwan Gwened gant ar c'hiz-se d'an nebeutañ. Setu e peseurt mod eo bet troet pozioù deus ar saozneg gant skolajidi ar 4re klas :


Pa 'h in kuit,  
A pa 'h in kuit  
Me 'vankay deoc'h a pa 'h in kuit  
Ma blev a vankay deoc'h,  
Me 'vankay deoc'h ne vern e men  
Me 'vankay deoc'h a pa 'h in kuit

Genin un tiked e'it un hir a veaj,  
Div voutailhad evit an hent.  
Gwelloc'h e vehe un nebeut tud genin  
Hag eh in kuit arc'hoazh da vintin

Genin un tiked e'it un hir a veaj,  
Get an dremmwel 'n hani bravañ  
Bout zo manezioù, stêrioù,  
ha traoù a voemay 'noc'h kement,  
Met sur on e vo bravoc'h genoc'h !

Diàr ganenn Anna Kendrick, troet get ar skolajidi 4vet  
Evit mont da sellet ouzh ar video, goulenn an aotre  
digant da dud ha bizskriv « CUPSONG in Breton »  
war [youtube.com](http://youtube.com)

« Get lucky »  
« Kaout chañs »



D'an 12 a viz Genver e oa bet pedet ar paotr Quentin Morvan da ganañ gant e c'hitar Kanaouenn mil-brudet strollad Daft Punk : Get Lucky, en abadenn Bali Breizh war chadenn Frañs 3. Da-heul eo bet lakaet ar video war internet, ha berzh bras he deus graet raktal : muioc'h evit 18 000 den zo bet o sellet ouzh ar video e-pad an 2 devezh kentañ ! Emañ ar video o tostaat ouzh ar 100 000 gwel goustadik... un taol kaer evit ur video e brezhoneg !

Evit mont da sellet ouzh ar video, goulenn an aotre digant da dud ha bizskriv « Get lucky bzh »  
war [dailymotion.com](http://dailymotion.com)



# Naggeneen

SENARIO & TRESADENNOÙ : CHRISTOPHE BABONNEAU  
BREZHONEG : C. ARZOUARIC'H HA Y.F. JACQ

EN « TOULL-BRAS »-SE E DA UR SEURT KEV DILEZET  
HAG A DALVEZE DA DOULL-LASTEZ.



KAVOUT A REAS DA NAGGENEEN E DA MAT AL LEC'H  
EVIT STALHAÑ UR STRILHEREZ\* ENNAÑ.



ANTRONOZ, GANT SIKOUR AN HOLL DUD A-YOUL-VAT,  
DA LÂRET EO AN HOLL, E VOE KEMPENNET MAT AL LEC'H.



GANT AN HOLL E DA BET KASET  
PEADRA DA VITELLAT.




NEUZE E PEDAS  
AR BERN TUD  
TROUZUS-SE  
DA VONT KUIT...




HA GANT MUIOC'H  
A NERZH E VOE  
BOUNTET AR RE  
ZIWEZHAÑ BETEK  
AN NOR.



PRENET EN DEVOA AN  
NOR WAR E LERC'H,  
KUIT DEZHAÑ DA VEZAÑ  
DIRENKET E-KERZH E  
LABOUR. SEVEL A REAS  
LISTENN AN TRAOU EN  
DOA EZHOMM ANEZH.



... HAG EN EM LAKAAT A REAS DA LABOURAT.  
KREGIÑ A REAS GANT AN DIAEZ HAG A RANKO  
DOUGEN AR VEOL. UL LAMPIG HEPEKEN EN DOA  
EVIT SKLERIJENNAÑ ANEZH.




\*Gant ur mekanik anvet strilherez eo e c'heller fardañ wiski.

# PELEC'H EMAÑ BRANDON

Bro-  
vBulgaria

## KARTENN ETRE VROADEL

### 'Foeter bro a vicher'



- Anv : BRANDON WILLIAMS
- Ganet e : Bloomington, rannvro Indiana, Stadoù-Unanet
- Micher : foeter bro
- Dudi : seniñ mandolin ha darbuka, mont da bourmen en natur
- Mod da vevañ : o tiwall ouzh an endro



Bulgaria is located at the crossroads of Europe and Asia.  
Emañ Bulgaria e kroazhent Europa ha Azia.

Throughout history, Bulgaria has seen many ethnicities and cultures come through it's lands.  
Dre an amzer ez eus bet meur a bobloù ha sevenadurioù o vevañ war he douaroù.

Among the many groups, are the Romans, Bulgars, Slavs, Hungarians, Greeks, Macedonians, and Turks.  
E-touez ar pobloù ez eus Roumaniz, Bulgariz, Slaved, Hungariz, Gresianed, Makedoniz ha Turked.

As early as the 4th century BCE, even Celts were settled near the current-day capital, Sofia.  
Kerkent hag ar 4<sup>re</sup> kantved a-raok Jezuz-Krist e veze zoken Kelted staliet nebell eus ar gêrbenn a-hiziv : Sofia.

In 2013, Bulgarians began protesting all over the country. People are protesting to end  
E 2013 e krogas ar vBulgariz da glemm er vro a-bezh. Emañ an dud o tibunañ er straedoù evit lakaat  
the government corruption that has continued from the Communist era which ended in 1989.  
breinadur\* ar gouarnamant da chom a-sav, an hini bet dalc'het abaoe ar maread Komunist bet echuet e 1989.

People keep protesting everyday in Sofia, and oftentimes numbered in the thousands.

\*E berr kamzaù,  
n'eo ket onest ar gouarna-  
mant e-keñver ar bobl.

O vanifestiñ e vez an dud bemdez e Sofia hag alies e vezent miliadoù.

Sofia,  
Bulgaria

София,  
България



# Yuna & Tualenn : Adnoz



Bet eo Louarnig e darempred gant div blac'h ar strollad ADNOZ (« awen » e kembraeg). Kompoziñ tonioù, skrivañ pozioù, seniñ, kanañ : kement se a vez graet ganto ! Ha tro 'teus bet da selaou ouzh o c'hanaouennoù c'hoazh ?

## YUNA, HA SENIÑ A REZ GANT UR BENVEG IVEZ ?

**Y :** Ne ran ket, ur blijadur e vehe, gwir eo, soniñ gitar ivez pe piano, met ne gavan ket an amzer. Diwezhatoc'h marteze... spi 'm eus !

## TUALENN, PELL ZO EZ PEUS DESKET SENIÑ GITAR ?

**T :** N'eus ken nemet 3 blez zo em eus kroget da zeskiñ e ma unan, get sikour internet.

## PELL ZO 'PEUS DESKET SENIÑ HA KANAÑ ASAMBLES ?

**T :** 7 pe 8 blez zo hon eus kroget evit ar blijadur da soniñ, p'hon eus en em anavezet er skolaj, e 6<sup>vet</sup>. E-pad ar blezadoù o deus heuliet betek an 3<sup>vet</sup> klas, eo bet daet ar pleg d'hen ober aliesoc'h. Euruz omp bet, p'hon eus gellet, evit hor gouel diwezhañ er skolaj, kanañ Hallelujah get ur vignonez deomp hag a sone piano. Met get un doare siriusoc'h omp kroget 3 blez zo bremañ.


**Y :** Ya, en eilvet. Kanal a raemp, er penn-kentañ, evidomp hepken, er gambr, pe er sal sonezh da skouer. Un deiz bennak he deus Lleuwen hor c'hlevet. Kinniget he deus deomp skrivañ ur ganaouenn ar ton Hallelujah evit he c'hentelioù c'hoariva. Berzh hon eus graet get sikour Oona, ur vignonez ag ar skolaj hag a c'hoari piano. Da heul he deus goulennet geneomp krouiñ ur ganaouenn e brezhoneg evit gouelioù ar skolaj, mod-se emañ ganet hor c'hanaouenn gentañ : « Hag un a chom ».

## KOMPOZIÑ TONIOÙ A VEZ GRAET ASAMBLES ?


**Y :** Hervez ar c'hanaouennoù eo, met pa skriv unan, an hini all a lak

ivez hec'h awen er ganaouenn.

**T :** Ya, a-wezhioù an awen ne za ket er memes koulz.



**E-KERZH UR SONADEC E KARAEZ**



**GANT LLEUWENN**

**PLIJOUT A RA DEOC'H KANAÑ TONIOÙ BRUDET IVEZ. GANT PESEURT ARZOURIEN HO PEZ AWEN ?**

**Y:** Ya, gwir eo hon eus plijadur get ar fed « adkemer » tonioù brudet hag a blij deomp. Kro- get hon eus get an dra-se, met klask a reomp bremañ mont pelloc'h, ha krouiñ.

**T:** Ya ! Get arzourien el Lleuwen, Bob Marley, Hindi Zarha, Jeff Buckley, Moriarty ha kalz reoù arall eh omp awenet.

**« KASET E OAMP BET DA SONIÑ EN ERER KOZH 2013 ! »**

**UR BLADENN ZO O VEZAÑ FARDET ?**

**T:** A-drugarez d'an Taol-Lañs hon eus ar gwir d'ober ur vaketenn e Karaez, a-benn un nebeudig amzer.

**Y:** Bout eh eus ivez ur raktres evit ur bladenn, met n'hon eus na muioc'h a ditour, nag amzer evit he frientiñ er mare-mañ. Kalz a amzer a gemer hor studioù...

**PEUR HO PEUS DESKET KANAÑ ?**

**T:** N'hon eus ket desket kanañ.

**Y:** Nann, biskoazh n'hon eus bet kentelioù.

**T:** Met, tamm-ha-tamm hon eus dizoloet hor bouezhioù asambles.

**Y:** Klask a reomp neuze liammañ anezhe ar muiañ hag ar gwellañ posupl.

**GWELET E VEZ LLEUWENN GANEOC'H WAR UR VIDEO, HO KELENNEREZ KAN EO ?**

**Y:** Ur ganourez a Vro-Gembre eo hag a oa hor c'hasourez el lise. Met biskoazh n'he deus desket deomp kanañ, daoust d'an holl guzolioù he do roet deomp.

**T:** N'eo ket hor c'helenneres kan, met hol lakaet he deus da vont ar-raok get ar sonerezh.

**Y:** Alies he zrugarekaomp en abadennoù a reomp. Hepti ne vehemp ket d'ar poent-mañ.

**T:** Ya, ne vehemp ket ken lañset.

**RAKTRESOÙ HO PEUS ?**

**Y:** Hag hon eus bet dija, gounezet eo bet an taol-lañs 2013 geneomp ! Souezhet bras omp bet ! Kaset e oamp bet neuze da soniñ en Erer Kozh, e-pad an hañv diwezhañ. Pedet hor boa ma breur, Ezhvin, hag a son gitar hag Elouan, é soniñ cajon ha bodhran ar ar leurenn Gwernig.

**T:** Bremañ hon eus abadennoù raktreset un tamm e pep lec'h e Breizh. Met mont a rin kuit e dibenn miz Mae, evit ur staj er C'hosta Rika a-drugarez d'am BTS, ar pezh hor redi da nac'hiñ deiziadoù 'zo e-pad an hañv.

**BETEK PELEC'H E FELLFE DEOC'H MONT ?**

**Y & T:** Ar pellañ ma c'hellomp !

**MERSI BRAS DEOC'H, MERC'HED !**

War internet e c'hellez mont da selaou ouzh sonennoù zo ha mont e darempred gant ar strollad :

• war Youtube :

Yuna ha Tualenn Adnoz

• War Facebook :

Yuna ha Tualenn Adnoz (goulenn an aotre da vont gant da dud)

• dre bostel : [adnoz@hotmail.fr](mailto:adnoz@hotmail.fr)



# A-DENN ASKELL

Ha plijout  
a rafe dit  
NIJAL?

Ha plijout a rafe dit nijal? Meur a zoare zo d'en ober evel-just. Deomp d'ober anoudegezh gant tud hag a implij ULMOÙ, da lavaret eo nijerezioù gourskañv dre geflusker.

## Petra eo un nijerez gourskañv dre geflusker?

Er bloavezhioù 1980 e oa bet savet ar re gentañ o stagañ ur c'harrig gant ur c'heflusker ouzh un deltaplaver. Bremañ ez eus nijerezioù a-bep seurt er rummad-se, an holl o vezañ skañv a-walc'h, etre 300 ha 450 kg, ha kaset war-raok gant ur c'heflusker bihan a-walc'h. Graet int evit un den, al levier, pe zaou d'ar muiañ. Lod anezho a c'hell di-bradañ eus n'eus forzh peseurt tachenn, ur park bennak gant ma vo bras a-walc'h. Er rummad-se e kaver :

Ar c'harr-nij skañv

damheñvel e stumm  
ouzh hini ar c'hirri-nij all.



Ar deltaplaver dre geflusker





**Daou seurt askell-viñs a gaver ivez er rummad-se ivez**



**Hag ur ballon dre geflusker zoken !**

**Hep disañjal an harz-lamm dre geflusker...**

Evit leviañ un nijerez gourskañv dre geflusker e ranker bezañ pemzek vloaz d'an nebeutañ. Ha ret eo tremen un arnodenn dre skrid, enni goulennoù diwar-benn an amzer, ar reolennoù surentez, an doare d'en em lec'hiañ... hag un nebeud re all ouzhpenn war an nijerez resis emeur e soñj implijout goude-se. Ul levr savet a-ratozh gant Kevread an nijerezioù gourskañv (FFPLUM) zo da studial pizh evit prientiñ an arnodenn-se.

Ur wech tapet anezhi e chomo c'hoazh d'ober ur staj evit deskiñ ober gant an nijerez-mañ-nijerez. Deomp d'ober anaouedegezh gant François Guillou, paotr an harz-lamm dre geflusker.

François, lavar deomp, petra 'peus desket er stummadur ?

Da gentañ penn em eus desket ober war-dro an harz-lamm.




Goude-se e raer war-dro ar c'heflusker e-unan. Pounner a-walc'h eo, tro 25 kg, hag ur wech loc'het e c'heller bezañ tumpet gant e nerzh. Gwelloc'h eo ober meur a daol-esa evit chom mat en e sav.

Ret eo gouzout penaos dispakañ anezhañ brav ha kempenn ha sachañ warnañ evit lakaat anezhañ da sevel.



Hag a-benn ar fin em eus lakaet an daou asambles evit deskiñ nijal kuit ha douarañ. Evit dibradañ ne 'z eus nemet reiñ nerzh d'ar c'heflusker ha redek un tamm. Ha bec'h dezhi ! Seul vui e vez plantet tizh seul uheloc'h e sav an harzh-lamm. Evit diskenn ne 'z eus nemet ober ar c'hontrol, da lavaret eo lakaat ar c'heflusker da vont sioulik.



Pa vezer war nes douarañ ez eo gwelloc'h lazhañ anezhañ evit diskenn sioulig a-bouez an harz-lamm. Evit treiñ ez eus daou zornell. Pep hini a lak ur c'horn eus an harz-lamm da blegañ un tamm. Neuze, ma sachan a-gleiz e tro a-gleiz ha ma sachan a-zehou e tro a-zehou. Aesoc'h, n'eus ket !

HA BEC'H  
DEZHI !

**Ha bremañ, peur hag eus  
a belec'h e nijez kuit ?**

N'eus forzh peseurt tachenn a c'hell bezañ implijet. E Kleder e vezomp meur a hini oc'h nijal kuit eus ur park nepell diouzh an aod. Ma vefemp tostoc'h ouzh aerborzh an Arme-vor e Landivizio e rankfemp kelaouiñ an tour-kontrol a-raok nijal kuit. Aze, n'eus ket ezhomm.

Nijal a reomp kerkent ha ma vez brav a-walc'h an amzer. Pa vez re a avel ne c'hellomp ket en ober, avat. Da 40 km an eur e ya sañset hon harz-lamm dre geflusker, gant un avel sioul. Goude-se e c'hellomp mont a-du gant an avel pe mont a-benn dezhi. Tro ar bajenn, ur c'hoari war an tizh zo o c'hortoz ac'hanout !

SELL PEGEN BRAV EO BRO-LEON A-DENN  
A SKELL !

Ur wech dibradet e rankomp pignat da 500 troatad, da lavaret eo tro 150 metr uhelder. N'hon eus ket droad nijal a-rez an douar, re zañjerus e vefe. Lod a ya kalz uheloc'h, betek 6 000 metr uhelder.

Met, gwelloc'h e kavan bezañ izeloc'h evit gwelet ar vro, an aodoù, ar mor.



Kae war lec'hienn ar c'hevread-se ma fell dit kaout resisadurioù : <http://www.ffplum.com/>

Reportaj gant Herve Peaudecerf. Trugarez da François Guillou evit e zisplegadennoù hag e boltriji. Ha kement all d'ar FFPLUM (Kevread an nijerezioù gourskañv).

# Dit da c'hoari !

Sell ouzh an daou boltred, aze dindan, ha lavar din da bet kilometr dre eur ez a hon harz-lamm :



Respost ar c'hoari : gant an avel a-du :  $40 + 20 = 60$  km/e ha gant an avel a-benn :  $40 - 20 = 20$  km/e. Gant un avel a-benn 40 km/e, ne c'hell ket an harz-lamm mont war-raok ken.

# SUDOKU

			5	2	
		1			3
			1	4	
	1	5			
3			6		
	6	2			

4	2				
				2	1
6	4				
				4	6
1	6				
				1	5


**DISOC'HOÙ**

6	4	3	5	2	1
5	2	1	4	6	3
2	3	6	1	4	5
4	1	5	2	3	6
3	5	4	6	1	2
1	6	2	3	5	4

4	2	1	5	6	3
3	5	6	4	2	1
6	4	3	1	5	2
5	1	2	3	4	6
1	6	5	2	3	4
2	3	4	6	1	5

Penaos e vez lâret...



**« YA »**

e Yezh ar sinoù ?

**DA VIZ MEUD A ZO STAG OUZH  
DA VIZ YOD. HIJAÑ A REZ  
DA ZORN MEUR A HECH  
D'AN NEC'H BETER AN TRAON.**

D'WALL DA GEMER ANU UNAN ALL. AN HOLL HAROZED A DENN AN EIL RE D'AR RE ALL. TE ZO O KLASK PIV OUT CHOAZH.--

-- MET KAVOUT AR RESPONT A RI MOD PE VOD.

ERRUET OMP. MAT EO DIT AMAN ?

YA MAT-TRE

FELLOUT A RA DIT TRUGAREKAAT, "PARE DEVIL" ?

ARABAT DIT EN EM LAKAAT EN ARVAR EUIT NETRA.

TRUGAREZ.

YA TADIG.

\*GER HA GER : « KRED-AN-DIAOUL », UNAN A ZO TOO-GOUZOUG. LAURENT

SIRIUS ON GANT SE, WILLIAM. PUJADUR 'TEZ O C 'HOARI AR JUSTISIER MASKLET.

CHAN'S 'TEUS BET FENNOZ.

E BERR : NE VIN KET AMAN BEPRED.

KOMPENET 'M EUS. A-DRUGAREZ DIT MA 'Z ON BEV.

TAMM EBET. DIZLEET\* EM EUS AC'HANOUT.

DIZLEET ?

KENAVO DIT, POL

\*POL\* ???

ANAVEZOUT A RA MA ANU!

\*DA LAVARET EO, RANKET EN DEUS AFERIOU POL, HEP D'AR PAOTR GOUZOUT EUS PETRA ZO KAOZ.

'MEUS KET  
LARET KAZI  
NETRA DEZHAN.

GORTOZ...  
'MEUS KET LARET  
DEZHAN NEMET  
ANU MA C'HARTER--

--HA SETU KASET  
EN DEUS AC'HANON  
E PENN MA STRAED,  
TOST DIRAK  
MA DOR!

KOULSKOUDE  
N'EM EUS KET  
LARET DEZHAN.

RE LUZIET  
EUIT MA  
SPERED...



DAU 'DEBRIN UN  
TAMM EUIT ADLAKAAT  
MA SPERED  
WAR-ELUM.

N'EO KET BET  
FINVET AN DEN  
FAOS EM BOA  
LAKAET DINDAN  
MA GOLC'HED.  
CHA CHA.

DRE CHA'NS EO  
BET FARDET MA GIWISKA-  
MANT GANT DANVEZ LIR  
GIWISKAMANT-SPUJAJ.  
MOD-ALL E VIJEN BET  
SKORNET.

BEVET AN  
NEOPREN!

CHA'NS O DEUS AN  
PUP-BLEIZ A VEZ  
GWELET ER FILMOU:  
BUAN EZ A O BLEU  
PINAR-WEL.

GANIN AVAT E  
CHOM PEP TRA.  
INGAL E RANKAN  
LEMEL MA BLEU.



AR MEMES TRA  
EO GANT MA  
SKILFOU.

REDIET ON  
DA FICHAD MA BIZIED.  
'FELL KET DIN TENNAJ  
DA WOLVERINE  
KENNEBEUT

"ABADE M'ON  
DELIET DA VEZAJ  
FOX-BOY EO AET  
MA BOUTONOU  
DIUAR-WEL.  
HA MA VEFES  
EM FLAS ?"

"FOX-  
BOY" !

UN TAOL-KAER  
EO HEMAJ,  
WILLIAM.

GALLOUT 'RAFEN  
KREDIN E ANAVEZET  
AC'HANON.



HA MA  
VEFE GWIR ?  
M'EN DEFE  
ANAVEZET  
AC'HANON PA OAN  
DIVASKL ?

MA ANV, MA  
CHOMLEC'H, MA  
EVEZH SACHET-  
GANT FOX-MAN.



BLAM DA BETRA  
E C'HELLFE  
ANAVEZOUT  
AC'HANON ?

N'EO KET ANAT.  
N'EO KET EM  
FAMILH E VEFEN  
KEMMESKET  
GANT TUD ALL.



HA DRESTHOU  
GANT AN DUP  
ROUZET BVELTAJ.



NE SERVIJ DA  
NETRA MONT DA  
GUZHAT ER VOUGEV,  
ERMINIG !

SKLAER EO URZH  
MESTR FINN :  
RET EO DIN PAKOUT  
AC'HANOUT HAG  
E RIN !




WOOA !  
BRAS-DIVENT  
EO AMAÑ !



DA BELEC'H EO  
AET AL LOENIG  
DA GUZHAT...



GRMMH!  
!!!



GLOUP !  
SETU UNAN ALL !  
JENTIL,  
AN AEROUANT,  
JENTIL !




SNIF!  
SNIF!

EEE,  
LAR DIN  
'TA...



...TEFE KET  
GWELET UN  
ERMINIG O  
TREMEN ?



GO  
RA!  
RA!

YA PE  
NANN EO  
DA RESPONT ?!